

TROIAD SINEMA 2023-2024

EVIT AR SKOLIOÙ



AVEL ER C'HORZ

Ur programm
3
film bevaat berr



AEROUANT
HA DANTELEZH



AN
UNKORNEG

Filmoù bevaat / Frañs / 2015-2017 / 45 mn / Cinéma Public Films / Advouezhiañ e brezhoneg : Dizale / Skignañ : Daoulagad Breizh / 02 98 92 97 23 / www.daoulagad-breizh.org



DOSER EVIT AR SKOLAER

AVEL ER C'HORZ

A-raok ar skignadenn	p.2
Pa zeuer d'ar c'hlas en-dro : dastum soñjoù kentañ ar vugale	p.3
Kaout soñj eus an istorioù	p.3-5
Ar frankiz : petra eo, pegoulz eo, penaos eo ?	p.5-6
Avel er c'horz : sonerezh ha frankiz	p.7-8
Mont da zizoloiñ bed moliac'hel ar grennamzer	p.9
Oberezhioù	p.9-10
Darempredoù	p.11
Fotoioù evit moulañ	p.12-13
Skritell evit moulañ	p.14

A-RAOK AR SKIGNADENN

Sellout ouzh ar skritell

- Pet film a vo gwelet ganeomp ?
- Petra a vez gwelet war ar skeudenn ?
- E peseurt mare e c'hoarvez an istorioù-se ?
- Peseur tudennoù eo ar re a vez diskouezet ? Gwazed int, pe maouezed ? Peseurt perzhioù heverk o deus ? Petra a c'heller lavar diwar-benn o doareoù hag emzalc'h an eil gant egile pe eben ? Petra a santit c'hwi ?
- Daoust hag istorioù gwir a zo anezho ?

Emañ tri film berr war ar roll, a gont pep a istor disheñvel. War ar skritell eo skeudennaouet pep film gant ur skeudenn, hag e ditl. Hirc'h eo film diwezhañ ar programm eget ar re all, Avel er C'horz e ditl. War e heul eo bet anvet ar programm a-bezh. Daoust ha gouzout a rit petra a vez diskouezet gantañ ?



Degaset omp da vare ar **Grennamzer** gant dilhad an tudennoù, ar c'hastell, ar soudard, ar vourc'h. Loened moliac'hel a vez gwelet ivez : an **aerouant** hag an **unkorneg**. **Maouezed** eo harozed an 3 istor. E-kreiz ar skeudennoù emaint. Aroueziet int gant prestoù : **ur fleüt, ur sil lakaet da dokarn, ur gurunenn**. Emañ **ar fleüt** e-kreiz ar skritell, hag a-bouez eo ar sonerezh er film. **Eliet**, ar plac'h a zo e-kreiz ar skritell, a dro he selloù war-zu ar gwaz a zo a-gleiz. **Kengred** a seblant bezañ etre an div dudenn, o vousec'hoarziñ emaint. En tu kleiz emañ al labous hag ar vourc'h ivez.



Eus an tu all emañ ar c'hastell hag ar **soudard droug ennañ**. Ar wezenn eo a zisrann an daou ved-se. Eliet an hini a **zeuio a-benn da gevreañ** anezho en-dro. E-barzh Aerouant ha dantelezh e **c'hoari ar plac'h hag an aerouant** asambles, ha laouen-tre e tiskouezont bezañ. Dic'hortoz eo ar sell-mañ. E-barzh An unkorneg ez eus **emglev etre ar rouanez hag an unkorneg**. Santout a reer an duster. Un huñvre a c'hellfe bezañ, moarvat.

PA ZEUER D'AR C'HLAS EN-DRO : DASTUM SOÑJOÙ KENTAÑ AR VUGALE

• Ha plijet en deus ar programm deoc'h ?

• Ha soñj hoc'h eus eus an istorioù ?

Eus ur senenn resis ho pefe c'hoant da gontañ ?

• Ha soñj hoc'h eus eus an tudennoù ?

Peseurt re o deus plijet deoc'h ar muiañ ?

Peseurt re hoc'h eus argarzhed ar muiañ ?

Petra a c'hoarvez dezho ?

KAOUT SOÑJ EUS AN ISTORIOÙ

Sellout pizh ouzh ar skeudennoù A1, A2, A3, B1, B2, B3

- Ha soñj hoc'h eus eus ar senenn-mañ, eus an dudenn-mañ... ?


- E peseurt istor e c'hoarvez ? Da beseurt mare ?

- Petra a c'heller lavar diwar-benn tudennoù pennañ pep istor ? Piv int ?

Aerouant ha dantelezh : A1 ha B1

Ar skeudenn A1 a ziskouez **Rozenn, an harozez, pignet war un aerouant !** Ken enaouet e oa o c'hoari ti bihan gant he mignonezed, ken m'he deus divizet **c'hoari ar marc'heg !** Er c'hoad en em gav gant un **aerouant**. Faezhañ a ra o vezañ drouk. Mont a ra laouen da **c'hoari ar jav eviti (A1)**.

Kejañ a reont neuze ouzh ur **c'hazh**. Aet eo skuizh e vefe kerzhet war e lost, ha mont a ra laouen da **c'hoari an aerouant didruez**. Da varzh e vo kemeret ar **c'hilhog**. Ha n'eo ket ur briñsez a vo da vezañ savetaet evel da gustum, met **div briñsez a ranko bezañ savetaet !** Plijadur en deus an tropelladig-se asambles (B1).




An unkorreg : A2 ha B2

War ar skeudenn A2 emañ ar **rouanez o toñvaat an unkorreg** a-raok degas anezhañ d'ar c'hastell evit diduellañ he gwaz, a **gav hir-hir e amzer**. Bamet e oa bet ar roue gant an unkorreg, en doa gwelet e-pad ur bourmenadenn.


Abaoe se ne soñje ket ken nemet en un dra : **gwelout an unkorreg en-dro ha kaout anezhañ gantañ en e gastell**. Kas a ra ar marc'heg **Berrgammed** d'ober klask d'ar « c'hrouadur lufus, ur marzh », « gwenn evel an erc'h », hag « ur c'horn » war e benn, met ar **marc'heg a zegas ur gerc'heiz dezhañ, hag ur c'havr war-lerc'h, hag ur frikorreg da echuiñ...**

Mont a ra ar rouanez war glask al loen marzhus, ha degas a ra anezhañ d'ar c'hastell. Cheriset eo an unkorreg, met bac'het eo er c'hastell. Menel a ra klañv. Daoust m'eo dic'hoant d'ober **e ro ar roue e frankiz dezhañ evit e saveteiñ** (B2).



Avel er c'horz : A3 ha B3

Eliet, harozez yaouank ar film, a son ar fleüt evit he mignon ar marvailher, a selaou outi gant plijadur (A3). N'he deus ket ar gwir Eliet da seniñ ar fleüt, na benveg all ebet, ha ma vez klevet gant soudarded ar roue e c'hellfent toullbac'hañ anezhi ! Al lezenn diskiant-mañ a zo bet embannet gant ar Roue, deuet en-dro diouzh ur brezel bras lec'h ma 'z eo deuet e vab, ar priñs, da vezañ bouzar ha mut. Abaoe an devezh-se en deus difennet ar roue ouzh e sujidi da seniñ pe da selaou sonerezh. E mod-se ne c'hell den ebet ken kaout plijadur e mod-se pa ne c'hell ket e vab hen ober... Luderien a oa tud Eliet ha toullbac'het int bet raktal. Ar plac'h yaouank, he deus kavet repu e ti an davarnourez, a zeu da gamaradiñ gant ur marvailher deuet eus ar Sav-Heol. Sonerien ampart int o-daou, ha diskiant e kavont al lezenn nevez. Stourm a reont outi o c'hwitellat, o vouskanañ, o stlakañ o daouarn... Deuet eo Eliet a-benn da guzhat ur fleüt ha seniñ a ra, gwech ha gwech all. Toullbac'het int un devezh bennak.



Dre chañs e teu ar priñs da glevet adarre pa selaou an ton brav sonet war ar prim gant tud ar barrez hag Eliet gant he fleüt en he zoull-bac'h ! Dibizoniet eo Eliet, he zud hag ar marvailher. Ar chafod, a oa bet savet evit terriñ fleüt ar marvailher dirak an holl, a zeu da vezañ ul leurenn. Tro-dro dezhi e vez kaset ur fest gant tout an dud evit lidañ ar sonerezh hag o frankiz deuet en-dro (B3).

Un harozez da bep istor

E pep film eo ar merc'hed ar re o deus ar perzh pennañ evit ma vefe dirouestlet an istor. E-barzh An Unkorneg eo ar Rouanez an hini a zoñva al loen, hag a lak ar Roue da gompren war-lerc'h e ranker digabestrañ anezhañ. E-barzh Avel er C'horz eo dieubet ar sujidi gant Eliet hag ar marvailher asambles, met ar plac'h yaouank an hini a zibab disentiñ o seniñ fleüt da gentañ ha meur a wech, daoust d'ar berz gant ar Roue ha d'an nec'h o devez an tudennoù all abalamour d'hec'h emzalc'h.

AR FRANKIZ : PETRA EO, PEGOULZ EO, PENaos EO ?


Tem ar frankiz a zo e kalon ar programm.

Aerouant ha dantelezh : ar stereotipoù

- Petra a ziviz Rozenn ober ?
- Petra a zo fentus, farsus, dibar en istor-mañ ?
- Petra a c'heller lavar diwar-benn an doare m'eo ingalet ar rolloù en istor-mañ ? Daoust ha kustum eo ? Gant peseurt tudennoù e vez c'hoariet ar rolloù-se er c'hontadennoù da gustum ?
- Daoust hag e c'hell paotred ha merc'hed c'hoari ar memes c'hoarioù ?
- Daoust ha reizh eo pe n'eo ket pa ziviz Rozenn cheñch c'hoari peogwir emañ oc'h hirvoudiñ ?

Empennañ, krouiñ, kaout ijin, ober traoù digustum, maez eus ar reolennoù boutin

Hir e kav Rozenn hec'h amzer pa rank c'hoari da c'hoarioù ordinal ar merc'hed, evel treuzwiskañ da briñsez ha c'hoari ti bihan. Frank eo hi rak divizout a ra aozañ ur c'hoari nevez a blijo dezhi evit gwir. Frank eo an tudennoù all ivez rak divizout a reont ober evel Rozenn : dont da vezañ an hini a fell dezho, soñjal int-i disheñvel eus ar re int kustum da vezañ, hag e mod-se, mont maez eus ar rolloù int bet rediet da chom enno gant an hengoun.



An unkorneg : ar frankiz nac'het

- Perak e fell d'ar roue e teufe an unkorneg d'ar c'hastell da chom ?
- Petra a c'hoarvez d'al loen ? Perak e kouezh klañv an unkorneg ?
- Daoust ha reizh eo pe n'eo ket pa zibab ar roue bac'hañ an unkorneg evit gellout bamañ outañ pa fell dezhañ ?

Kaout doujañs evit emrenerezh pep hini

Ul loen marzhus ha gouez eo an unkorneg, arouez ar frankiz hag an natur ivez, ul loen ne c'heller ket doñvaat hep lakaat anezhañ en argoll da vezañ foeltret pe distrujet. Galloudus eo ar roue, ha neuze e kred dezhañ e c'hell kaout pep tra evitañ. P'en em gav gant an unkorneg er c'hoad e tiviz pakañ anezhañ evit gellout bamañ outañ pa fello dezhañ ha diskouez anezhañ evel ma vefe un teñzor bet kavet gantañ. Met gwall glañv e kouezh an unkorneg pa 'z eo forc'het eus e endro naturel.

Avel er c'horz : ar frankiz da zisklêriañ e soñj

- Pelec'h ha gant piv en em gav ar marvailher ?
- Piv eo Eliet ha petra a zo c'hoarvezet dezhi ha d'he zud ?
- Perak eo berzet seniñ sonerezh ouzh ar marvailher ?
- D'ho menno, daoust ha reizh eo pe n'eo ket reizh e vefe berzet seniñ sonerezh ha toullbac'het tud Eliet gant ar roue ?
- Perak en em sav an annezidi ?

Gellout dibab

Ar marvailher a ziskouez ar **frankiz** : o **veajiñ** emañ dizehan, **emren** eo eñ ha bevañ a ra gant ar sonerezh a vez kaset gantañ da bep lec'h war e gein ! Eliet, a chom aheurtet o seniñ sonerezh daoust ma 'z eo berzet gant ar roue, a ziskouez frankiz ivez. Aspediñ a ra ar re all da chom hep asantiñ d'o bed bezañ didrouz, **da stourm**. Ul **labous**, arouez ar frankiz, a vez gwelet meur a wech. Pa lavar ar marvailher d'an davarnourez eo « tristig » « kontañ istorioù hep seniñ » e respont hi : « Goût a-walc'h 'ran. **Met n'heller ket ober mod all.** ». He respont a ra anv eus unan eus diazezoù ar frankiz : **bezañ dizalc'h a dalvez gellout dibab, kaout ar gwir d'ober divizoù evit ar pezh a sell diouzhimp.**

Ar frankiz a vez meur a veizad disheñvel enni. Amañ ez eus anv eus dibaboù hag oberoù a reer hep nozout ouzh ar re all. Rak gwir eo e c'heller embann ne ra ar Roue nemet ober gant e frankiz pa verz ar sonerezh ouzh ar re all peogwir ne fell ket dezhañ klevet sonerezh ken... Met pa ra kement-se e nac'h frankiz ar re all, a fellfe dezho kenderc'hel da seniñ ha da selaou sonerezh ! Bezañ dieub na dalvez ket kaout ar gwir d'ober pep tra na forzh petra. En em aotren d'ober forzh petra n'eo ket bevañ evel un den dieub, met evel un despot.

EVIT MONT PELLOC'H : kinnig d'ar skolidi tresañ ar frankiz



AVEL ER C'HORZ : SONEREZH HA FRANKIZ

Sellout pizh ouzh ar skeudennoù D1, D2, D3, D4, D5, D6

- Petra a welit war ar skeudennoù ?
- Petra a c'hoarvez d'ar mare-se eus ar film ?
- Daoust ha pouezus-tre eo ar sonerezh evit tud ar vro-se en istor ? Penaos e ouzer kement-se ?
- Daoust ha « **gwelet** » e vez ar sonerezh ouzh ar skeudenn mareoù 'zo eus ar film ? Penaos e vez diskouezet ?
- Petra eo deuet ar marvailher d'ober e kêr Eliet ? Daoust ha pouezus eo e berzh en istor ? Ha soñj hoc'h eus eus tout ar **binvioù** a vez sonet gantañ ?




Ar sonerezh hag ar marvailher, arouezioù ar frankiz

A-raok ar berz e sone muzik an holl dud er vro, war ar pemdez. Ar skeudenn **D1** a zo bet tennet p'emañ an davarnourez o kontañ d'ar marvailher petra eo istor he bro ha penaos eo deuet ar roue da verzañ ar sonerezh. Ar sekañs bevaat berr a skeudennaou he danevell a zo disheñvel – tres, livioù – ouzh doare bevaat pennañ ar film. Ennañ e vez leurennet **notennoù sonerezh faltazius** a ziskouez edo ar sonerezh e pep lec'h e buhez ar vro-se.

Er film eo liammet an diouer a sonerez gant an diouer a frankiz ha **liammet eo ar frankiz gant ar sonerezh**, evel war ar skeudennoù **D2 ha D3** : dinijal a ra ar c'horz-dour ha kemer tamm-ha-tamm stumm notennoù muzik evit kludañ war ur regeneg. **Al labous**, arouez ar frankiz ivez, a gan e-lec'h binvioù ar marvailher hag eilañ a ra anezhañ p'emañ o kontañ e fablenn. War ar skeudenn **D4**, e teu al labous da gaout stummoù difetis ha cheñch a ra liv gant lusk ar sonerezh.

Er marvailher eo enkorfet **hollvedelezh ar sonerezh**, rak gant ar yezh-se e c'hell redek ar bed ha kejañ ouzh an dud e kement lec'h m'emañ ennañ. **Seniñ a ra meurv a venveg disheñvel (D5)**. Kas a ra ur **gourzaboulin** gantañ war e gein, **simbalennoù** a-us, **grizilhonoù** ouzh e zaouufenn, met seniñ a ra **oud** (benveg dre gerdin) ouzhpenn, c'hwezhañ a ra en ur **mezoued** (ur seurt biniou) hag en e chakod e talc'h ur **fleüt** gaer-meurbet !



Un titl leun a varzhoniezh hag a sonerezh

Korz-dour a vez gwelet kalz er film-mañ. Bravaet e vez ribl ar geunioù hag ar sterioù ganto. Er senenn ziwezhañ, p'emañ an holl o seniñ, e tinij ar c'horz-dour dirak prenestr ar piñs ha dont a reont da vezañ **notennoù sonerezh**.

An **avel** meneget en titl a ra dave da **c'hwezh an dud** hag ar c'horz d'ar **fleüt**. Deskiñ a reomp gant ar film e c'heller oberiañ ur fleüt en ur gorzenn-dour. "**Seniñ fleüt**" a lavar an titl gant barzhoniezh...

An avel a zegas koun eus mennozh ar **frankiz** ivez. Ar frankiz n'heller ket gwelet anezhi, ha padal **hec'h efedoù** war hon endro hag hor buhez pemdeziek a zo **gwir ha fetis**, evel an avel a lak delioù ar gwez da gouezhañ hag ar c'horz da blegañ, daoust dezhañ da chom disgwel... Er c'hontrol e vez gwiriet aes pa n'eus ket a frankiz...

A-benn ar fin e c'hell an avel, evel ar sonerezh, en em laerezh e pep lec'h, ne ra van nag eus ar mogerioù nag eus ar skoilhoù. Er film e vez diskouezet kement-mañ pa grog an tudennoù da seniñ war ar prim a-dreñv da vogerioù an toull-bac'h.

EVIT MONT PELLOC'H : anavezout ar familhoù binvioù

Ar son skignet gant ur benveg a zo produet gant an aer o fiñval gant :

- c'hwezh ar soner evit ar binvioù **dre c'hwezh** (koad ha kouevr) : fleüt, saksofon, oboell, korn-boud, treujenn-gaol, binioù, akordeoñs, hag all.
- piñsat, frotañ pe skeiñ evit ar binvioù **dre gerdin** : gitar, oud, telenn, klaou kerden, violoñs, violoñsel, gourrebed, piano, hag all.
- stroñsoù roet pe skrabañ evit ar **binvioù-skoñ** : gourzaboulin, simbalennoù, taboulin, marakas, zilofon, derbouka, djembe, hag all.

Pa zeu an aer a zo e-barzh ar benveg pe tro-dro dezhañ da stokañ outañ, forzh peseurt doare e vefe, e vez kemmet. Mont a ra ar froum betek taboulin hor skouarn e stumm gwagennoù son, ar « sonioù », a vez treuzkaset war-lerc'h d'ar c'hreizennoù nerval a zisifr hag a zispleg anezho.

MONT DA ZIZOLOIN BED MOLIAC'HEL AR GRENNAMZER

- E peseurt mare e seblant an istorioù-mañ c'hoarvezout ? Penaos e weler kement-se ?
- Daoust hag istorioù « gwir » a zo anezho, pe istorioù o dije gellet c'hoarvezout er bed gwirion ? Penaos e weler kement-se ?

Er Grennamzer e c'hoarvez ar filmoù (10vet - 15vet kantved pe tro-war-dro) : kastelloù-kreñv, marc'heien houarnwisket, giz an dilhad, marvailherien, sonerezh awenet gant ar **Grennamzer**, met ivez daveoù da gontadennoù, **mojennoù ha loened moliac'hel** liammet gant ar mare-hont e soñjoù an dud.

Kontadennoù, istorioù faltazi eo an daou film kentañ. E pep istor ez eus un elfenn voliac'hel n'eus ket anezhi er bed gwirion : un aerouant hag un unkorneg. Ar film diwezhañ en deus stummoù a denn eus ar gwirvoud : ne vefe ket dibosupl e c'hoarvezfe an istor-se er bed gwirion.



OBEREZHIOÙ

Aerouant ha dantelezh

Graet eo hor skipailh diroll gant 4 dudenn ! Met deuet ez eus 3 abuzer amañ ; kelc'h anezho gant da greion.




Responoù : an erev, ar gaeuenn hag an houad a zo abuzerien (1, 2 ha 6).

Graet eo ar skipailh diroll gant ar plac'hig, an aerouant, ar yar hag ar c'hazh (3, 4, 5 ha 7)


An unkorreg

Tro wenn en deus graet Berrgammed. Mont a ra ar rouanez hec'h-unan d'ar c'hoad da gerc'hat an unkorreg. Sikour dezhi da gavout hec'h hent o lakaat anezhi da dreuziñ.



Avel er c'horz

P'en em gav ar marvailher er rouantelezh emañ o seniñ ur benveg. Kenere ar pikoù etre 1 ha 19 evit kavout petra eo.



Respont : Ur vandolinenn

Evit gouzout hiroc'h :

Danvez war ar film e galleg (teuliad kealouiñ, teuliad pedagogel, fotoioù, hag all.) :

http://www.cinemapublicfilms.fr/films/le_vent_dans_les_roseaux/

Teuliad sevenet gant **Daoulagad Breizh**

Diwar doser pedagogel Kreizenn sevenadurel “Les Grignoux” ha doseroù Cinéma Public Films

Troet e brezhoneg gant : **Lena Catalan Marcos**



Daoulagad Breizh

13 straed/rue Michel Le Nobletz
29100 **DOUARNENEZ**


02 98 92 97 23

contact@daoulagad-breizh.org

www.daoulagad-breizh.org



A1



A2



A3



B1




B2




B3



D1




D2




D3



D4



D5



D6

Sinema e brezhoneg

AVEL ER C'HORZ

Ur programm

3

film bevaat berr



Filmoù bevaat / Frañs / 2015-2017 / 45 mn / Cinéma Public Films / Advouezhiañ e brezhoneg : Dizale / Skignañ : Daoulagad Breizh / 02 98 92 97 23 / www.daoulagad-breizh.org

